

Rummad 2 (live / niveau / level 2)

Assimil Collection sans peine

Degemer mat

1. Salud (1) deoc'h, tud (2) yaouank ;
2. 'maoc'h o vale bro ?
3. Ya, sur ; plas 'zo evit hon teltennoù ?
4. Pet teltenn (3) 'zo ganeoc'h ?
5. Div, unan vihan hag unan vras. (4)
6. Ma'z eo (5) mat deoc'h ez eus plas a-dreñv ar gwez-derv (6).

Au terrain de camping (en-le terrain-camper)

1. Salut, jeunes gens (salut à-vous, gens jeunes) ;
2. vous êtes en voyage (êtes en-train-de parcourir pays) ?
3. Oui, absolument (oui, sûr) ; y a-t-il de la place (place est) pour nos tentes ?
4. Combien de tentes avez-vous (combien tente est avec-vous) ?
5. Deux, une petite et une grande.
6. Si cela vous convient, il y a de la place derrière les chênes (si est bon à-vous est place derrière les arbres-chênes).

Prononciation

é-n' dachè-n' gan-m'pi

1. sa:lud dèwHH, tud yòwang-k ;
2. màw Ho va:lé bró: ?
3. ya:, su:r' ; plas' zo évi:don-n' tètè-nou ?
4. pét' tètè-n' zo: gan-nèwHH ?
5. diw, u:nan-n' vi:an-na-gu:nan-n' vra:s'.
6. ma zèw ma:d dèw-Hé-zeus' pla-zadrén war goué-dèrw.

Notes

1. **Salud**, *salut*. C'est une façon un peu familière de saluer, par exemple entre gens de même condition, entre hommes, et à l'adresse de groupes.
2. **Tud**, *gens, hommes*, est le pluriel de **den**, *personne, être humain*.
3. Rappelons que l'interrogatif **pet** entraîne un singulier.
4. **Unan vihan**, *une petite*. Le pronom indéfini **unan**, *un, une*, entraîne une mutation identique à **an hini**, au contact de l'adjectif qui le suit : la mutation par adoucissement dénote un nom féminin, la non-mutation, un nom masculin (**unan bras**, *un petit*).
5. **Ma'z eo**. Devant les formes verbales simples du verbe "être" commençant par une voyelle, la conjonction **ma** se présente sous la forme **ma'z : ma'z oc'h klañv**, *si vous êtes malade*.
6. **Gwez-derv**, (*des*) *chênes*. La langue bretonne utilise volontiers cette tournure introduite par **gwez** suivi d'un trait d'union, pour désigner des arbres d'essences différentes.

Exercices

1. Treiñ / Thème

- a) Derrière la maison il y a des chênes.
- b) Regarde les arbres, il y en a un petit et un grand.
- c) Dors si tu es fatigué !
- d) A côté de la tente, il y a encore de la place.

2. Lakaat an anv-gwan goude "unan" / Placer l'adjectif après "unan"

- a) Dibab ur grampouezhenn : unan (*klouar*) pe unan (*tomm*).
- b) Chas a zo er straed, unan (*bras*) a red war-lerc'h un den kozh.
- c) Ur garavanenn nevez en deus Yann bremañ hag unan (*kozh*) en deus e vreur.
- d) Merc'hedigou à c'hoari war an aod hag unan (*bihan*) a zo er mor.

3. Leuniañ gant "pere", pe "pet" / Compléter avec "pere", ou "pet"

- a) Setu teltennoù nevez. a zo deoc'h paotred, ar re velen pe ar re ruz ?
- b) boutailhad win hoc'h eus prenet dec'h ?
- c) eo ar re blijusañ d'ho soñj ?
- d) Lavar din karr a zo a-dreñv an ti.

4. Lakaat an anv-gwan goude "re" / Placer l'adjectif après "re"

- a) Petra 'ra ar re (*bras*) ?
- b) Mont a ra ar re (*koshañ*) da gentañ !
- c) Ar re (*barrek*) a ra al labour-se.
- d) Pelec'h emañ ar c'hrampouezh ? Ar re (*tomm*) 'zo war un asied.

5. Lakaat an anv reizh e-barzh ar frazenn / Placer le nom correct dans la phrase

- a) Pet (*den / tud*) a zo oc'h ober al labour diaes-se ?
- b) Pemp (*kizhier / kazh*) 'zo war gwele Naig.
- c) Ar (*vamm / mammoù*) n'emaint ket er gegin.
- d) Pet (*karr / kirri*) en deus Alan ?